



DISPUT

2649

ETRE

AR MARO HAC AN DEN YAOUANC.

AR MARO.

CHETU me erru , va mignon ,
 Da ober did renta rason
 Demeus da vuez tremenet ;
 Scuis eo Doue eus da velet.

AN DEN YAOUANC.

Autrou Doue , piou eo emàn
 A zo deut quen disonet amàn ?
 Va speret a zo oll troublet
 Gant ar spont-bras eus e glevet !

AR MARO.

Petra leveres , va mignon ?

Les da spont , ha cont da rason ;
 Ha ne vouies - te quet erfat
 E teujen abred pe divesad ?

AN DEN YAOUANC.

Allas siouas ! ne vouien quet
 E cleac'h donet quet abret ;
 Me sonje din , pa voan dispos ,
 Ne varvgen quen ne vijen cos.

AR MARO.

Mes alies e poa clevet
 Ne meus biscoa den espernet ;
 Hac e dleàn an oll falc'had ,
 Cos ha yaouanc , eus a bep oad.

AN DEN YAOUANC.

Allas siouas ! en joa ar bed
 E voa va speret occupet ;
 Em yaouanqtiz voa va fianç ,
 Hac em mignonet va esperanç.

AR MARO.

Penos , den sot hac aheurtet ,
 Ne voas - te quet avertisset
 Da reformi da goall vue ,
 Pa ne voas quet sur eus un de ?

(3)

84

AN DEN YAOUANG.

Allas ! me vel oun faziet ;
Mar plich guenec'h c'hoas depordet :
Roït din ur blaves termen ,
Ma rin quent mervel pinigen.

AR MARO.

Penos e fell d'ide ober
Pinigen e quen ber amser ,
Pa na heus grêt bete vremen ,
Ha te pell zo var ar bed - man ?

AN DEN YAOUANG.

Me bromet deoc'h , a dra certen ;
E rin promptamant pinigen ,
Da repara va yaouanqtiz ,
Ma roït din termen ur mis.

AR MARO.

Bet avoalc'h ec'h eus - te amser ,
Ma carjes ober da zever ,
Mæs ne alles pelloc'h apel :
Erru an heur , red eo mervel.

AN DEN YAOUANG.

Pa n'en deo quet ho polonte
Va lesel queit-se en bue ,

(4)

Mar plich guenec'h , da vianàn ,
Un devez c'hoas a c'houlennàn.

AR MARO.

Ha - ça ! bremàn patientet ,
Erru an heur , ret eo monet ;
Rac se - ta , sonch da goall vue ,
Ret eo monet dirac Doue.

AN DEN YAOUANC.

Penos eta , mervel zo ret
A greiz va nerz ha va yec'het !
Penos quitât va desseniou ,
Va joa , va c'herent , va madou !

AR MARO.

Divead out bremâ da ouela ,
Homàn eo da heur divesa :
È zàn da rei did an taul mortel ,
En heur-mâ e renques mervel.

AN DEN YAOUANC

E c'houlen sicour digant e guerent ha mignonet.

O va c'herent , va mignonet ,
En han Doue va sicouret !
Scoet oun gantàn d'ar maro ,
Deut d'am sicour , hastit affo.

AR MIGNONET.

Evit bremàn ne allomp quet ,
 Beza hon eus affer bresset ;
 Pa retornim , ni a velo ;
 N'oc'h eus quet a fæçon varo.

AR MARO.

Guel , den sot ha den aheurtet ,
 Petra respõnt da vignonet
 Avou bremàn , d'en diãvis ,
 Peguer trompus ê yaouanquis.

AN DEN YAOUANC.

Guir a leret : me zo trompet
 Gant yaouanquis ha mignonet ;
 Bremàn me ro dezo mallos !
 Euz va malheuriou int bet eos.

AN DEN YAOUANC

E c'houlen sicour digant Doue hac ar Verc'hes.

Me ho supli , ô va Jesus ,
 Ha c'hui , Guerc'hes , mam druesus ,
 Me ho ped , dre ho madelez ,
 D'am sicour c'hoas , me , pec'her quez !

AN AUTROU DOUE.

Penos ec'h eus an assuranc

Da c'houlen ouzomp assistanç ?
 Bepret out bet hon adversour
 Petra ve demp-ni da sicour ?

AN DEN YAOUANC

E c'houlen sicour digant ar Sænt.

O sænt , mignonet da Zoue ,
 O pet truez euz va ene !
 Gant an oll oun abandonet ;
 En han-Doue va sicouret !

AR SÆNT.

Penos ec'h eus an ardisson
 Da c'houlen hor protection ?
 Ne heus quet mitet hor goueliou ,
 Nac imitet hor vertusiou.

AN DEN YAOUANC

E c'houlen sicour digant e Æl mad.

O va Æl-mad , ô va den quer ,
 Va gardien e peb-amzer ,
 M'ho ped va sicourit brema ,
 Em necessite diveza.

AN ÆL.

Quement a allen ameus grêt
 Bete vremañ en da andret ;

Poent e zeo din d'abandonin',
Pa ne c'heus quet sentet ouzin.

AN DEN YAOUANG.

Me vel erfad ê tremenet
V' amzer da vesa sicouret ;
Bebet emeus en libertin ,
Doue à rent justic er fin.

Em maro em diles Doue ;
Pa'n boan dilezed em huc ;
Resistet m'eus de oll graçou ,
Hac em refus em goulennou.

AN DEN YAOUANG

E quitaat e guerent hac e vignonet..

Dilset oun en abandon ;
N'en deus mui evidon pardon.
Adieu , querent ha mignonet ,
Adieu , bed fall ha milliguet !

AN DEN YAOUANG

E quitaat joüüsdet ar bed-màn.

Adieu , grandeur ha bombançou ,
Henoriou ha ven triomphou ;
Adieu d'an traou eus an douar ,
Adieu d'an ên , adieu d'e c'hloar.

Mallos d'ar vam , mallos d'an tad
A zo bet ouzin quen ingrat ,

M'o deus grêt din coll va ene,
D'am beza leset em liberte !

E zàn da vesa enterret
En ifern gant an dud daonet,
Da lesqui e creiz ar flammou,
Da jamæs gant an diaoulou !

A possubl ve, ô va Doue,
E serfac'h ouzomp dor an eê !
Accordit din, ô va Zalver !
Eur plaç en ho cloar eternal.

23 bis

RECIT

*Composet a nevez var sujet un exempl
erruet gant tri Maleürus.*

Var ton : An Uzuiller.

BRETONNET, me ho suppli, tostaat da glevet
Ur recit eus un exempl a nevez erruet
Gant tri maleürus impi, cruel ha direson,
En em roët d'an diaoul eus a greis o c'halon.

Er bloa nil eiz cant ugent, er guær eus a Boulan,
Evit rei selær da entent dirac ar Gristenien,

date: 1820

Quement den em selaou , hac a so badeset ,
Oc'h ober reflexion , a vezo estonet.

En eizvet deiz varnuguent demeus a viz guenver ,
En deveziou meulargez , evit explica sclêr ,
E voa an tri maleürus en un hostaliri ,
Eus al liqueuriou guella ouz en em servichi.

Ha pa voe leun o c'hofoù , o devezs concluet ,
Eutrese quemer masquou , evit mont da redet :
Daou anê e deus laquet var o queinou croc'hen ,
Da c'holo o habijou , ha querniel var o fenn.

An drivet eus anezo eo ar maleürussa :
Pa vez e gamaradet o vonet diganta ,
E sonjas mont d'ar garnal , hac en devezs fouret
E benn en ur penn maro , eusus vœa da velet !

En toullou e zaoulag ec'h alum flamboesou ,
Evit monet da redec partout dre ar ruyou :
Ar vugale a zaille partout aroc dezàn ,
Nemet an dud ræsonnabl a dec'he dirazàn.

Ober a rezont o zro , hep en em rancontri ,
Var ur c'horn demeus e guer en em gavzont o zri ,
Hac eno o deus galvet ar sænt hac an æle ,
Hac hor Zalver biniguet da renta brezei de.

Dre ar bouez eus al langach o devezs prononcet
A enep hor Mestr divin hac hor Mam biniguet ,

E scoas un taul curun a ziouc'h d'ê quer ponner,
Quen a ra ur grenaden en oll ties en quær.

Epouvantet eo calon an oll habitantet
O sonjal e voa erru ar fin demeus ar bed ;
Penevert m'oa deus clêvet an declaration,
E voant prest da berissa en spont hac en eston.

Distrei a r'ar maleürus da zigaç d'ar garnel
Ar penn maro voa gantàn d'e blaç, an den cruel !
Hac e tenas d'e bedi, o trey e guein dezàn,
Dont an deiz varlerc'h d'e di digantàn da goaniàn.

Ac'hane e teu d'ar guær da guemeret repos,
Hac e za en e vele ar rest demeus an nos ;
Mæs ne alle quet, cousquet gant an anaon mat,
E voa gantàn tourmantet, ô tonet d'e biquat.

Hep beza bet discleriet da nicun euz e edi
E furi, e hardisson hac e effronteri,
E zäs gante assambles d'ar parc da labourat,
N'ell quet reposi, pa zonch en e grim detestabl.

D'an nos, pa voa aseet gant e dud ous an dol,
Ec'h erru ar penn maro da darc'haf var an nor,
Hac outàn ar relegou, dre buissanç Doue,
Pere voa ouz en douguen entre m'oa en bue.

An hini a zo savet da zigueri desàn,
Ous er guelet oc'h antren, a deuas da goësàn ;

Cregui ra an dud ennàn en avis e zével,
 Quemant e oa estonet m'en deus renquet mervel!

Avanç a ra an Anaon, hac en deus lavaret:
 Chomit, va zud, da goania, ne genit den ebet;
 Ousit e ras va c'hombat, va c'homper maleürus,
 Va guelet a rez bremàn en ur stad perillus!

Petra e teus goneset evit va zourmanti,
 Elec'h pedi evidon, e crespuez va annui.
 Goulen pardon eus Doue eus de goal bec'hejou;
 Meritet ec'h eus besa dispennet a bezyou.

Ar muya tra am glac'har, nonobstant d'am ol boan,
 Eo ar galonad a do ha da dad ha da vam,
 O velet o deus magnet ur buguel libertin,
 Ha guelet en diframma, ô Doue, pebes fin!

Daou zevez goude ma voa an exempl erruet,
 E varv e dad hac e vam, gant glac'har sesisset.
 Chetu maro pevar den demeus ar memes ti.
 Pedomp Doue evito hac ar verc'hes Vari.

An den-màn a voa oaget a bemp bloas varnuguent.
 Ho pedi ràn, tud yaouanc, da guemeret exempl,
 Da bellât eus an danger ha goal gompagnunes,
 A so cos da vil maleur ha mil fallagries.

Pa gleo e zaou gamarad pe seurt punicion
 En deus bet ar maleürus goude e hardisson,

E quitaont o moyen, ha mont er mæs o bro,
E vit ober pinigen ar rest eus o deizio.

Ha c'houi, tadou ha mamou o devez bngale,
Gorrigit hac instruit, ha bet soign aneze;
Rac mar manquit varneso, abret pe divezat,
E rint dezo o unan ha deoc'h goual galonad.

Goulennomp digant Doue hac hor mam ar Verc'hes,
Goude ar fin hor buez hon lod er baradoës,
Da renta meleudiou d'hor Zalver biniguet
Epad an eternite en e eürusdet.

FIN.



E QUEMPEL,

Eus Imprimeri S. Blot, e ty pehini e gaver bep
Canticou a levriou all bresonec.